

A N N - F A N C H E E M I N E R

**41 - Me 'm eus choezet e'it bout mestrez - J'ai choisi pour maîtresse**

Marie-Josèphe RETRAITE, Iniel (Inguiniel)

Les ritournelles, inscrites en italiques, sont reprises dans tous les couplets.

Me 'm eus choe - zet e'it bout mes - trez, *o ge o ge,*

Me 'm eus choe - zet e'it bout mes - trez,

Me 'm eus choe - zet e'it bout mes - trez,

Ur pla - c'hig koant, ur vi - nou - rez,

Me 'm eus choezet e'it bout mestrez, *o ge, o ge,*  
 Me 'm eus choezet e'it bout mestrez, *(bis)*  
 Ur plac'hig koant, ur vinourez,

Ur plac'hig koant, ur vinourez,  
 Ha me 'ya d'hi gwelet 'lies,

Me 'ya aliesik d'hi gwelet,  
 Mard 'an 'ar varc'h, me 'ya 'ar droed,

Mard 'an 'ar varc'h, me 'ya 'ar droed,  
 Me 'ya ataw ur mod bennek,

Me 'ya ataw ur mod bennek  
 'Gasa da ma dous un dra bennek,

'Gasa da ma dousig a brezant  
 Ur walenn aour, unan argant,

Ur walenn aour, unan argant  
 Pe ur mouched lien Holland,

Pe ur mouched lien Holland  
 A vo bordet get neud argant,

Get neud argant e vo bordet,  
 Ar p'var c'horn a vo bokedet,

Ar p'var c'horn a vo bokedet  
 Get bokedoù roz-violet.

J'ai choisi pour maîtresse, *o ge, o ge,*  
 J'ai choisi pour maîtresse, *(bis)*  
 Une jolie fille, une héritière,

Une jolie fille, une héritière,  
 Je m'en vais souvent la voir,

Je m'en vais la voir souvent,  
 Si je (ne) vais à cheval, je vais à pied,

Si je (ne) vais à cheval, je vais à pied,  
 J'y vais toujours d'une façon ou d'une autre,

J'y vais toujours d'une façon ou d'une autre  
 Apporter quelque chose à ma douce,

Apporter à ma douce comme présent  
 Un anneau d'or, un anneau d'argent,

Un anneau d'or, un anneau d'argent  
 Ou un mouchoir de tissu de Hollande,

Ou un mouchoir de tissu de Hollande  
 Qui sera brodé de fil d'argent,

Qui sera brodé de fil d'argent,  
 Les quatre coins seront fleuris,

Les quatre coins seront fleuris  
 De fleurs mauves.